

- 59 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

105. FEUNTEUNELLE

(Follennot 53-55)

Feunteunelle a lavare
 Na de briet ag an deis se :
 - Kenavo da bardon Tremel.
 Mar bezan bec me deuo dar ger.
 Ma na deuan me zigasso liser.

Ar benerez a lavare
 Da bardon Tremel pa tremene :
 - Tremened eo pardon Tremel;
 Feunteunelle ne deu ked dar ger,
 Keneubeut ne zigas liser.

+

Feunteunelle a lavare
 Ebars e Paris pa errue :
 - Bonjour Roue a Rouanez
 Me zo deut iacuankik d'ho palez
 - Pa zoc'h deut, deut mad da viret.
 Evid do klasq nen dachen ket.

+

Ar benerez a lavare
 Da(r) palifrinier ag an deis se :
 - Stagit deg marc'h oc'h va c'haros
 Da Paris me renk mont fenos.
 Me a renk da Paris monet
 A pa krevfen eur marc'h peb kamet.

Ar benerez a lavare
 E bars e Paris pa errue
 Na de c'hocher enon neuze :
 - Lakid ar c'hezeg er marchossi.
 Roit kerc'h a foen dezo da dibri
 Ben ma zin a Paris e pein.

- Rouanezik, ma neum c'heret
 Grid eur plijadur em reket :

- 60 -

E vriek^o d'ar vreg man houlenfet.

o Kompren
fe fried

Ar rouanez a houlenne
Deus e vriet ag an dei se :
- Otrou sire, ma nam c'heret
E vriet d'ar vreg man a roffet.

- Evid e vriet nan do ket
Var e varo e meus sinet
Eneb dam sin ne allan ket monet.

Na Feunteunelle evel ma c'hlevas
Na d'ar roue a respontas :
- Re iacuankik e da varo
Da zond dam lakad d'ar maro.

- Mar don me re iacuank da varner
Te a zo re koz da ravajer
Revinet eo ganez Breis-Izel.

+

Feunteunelle a lavare
Dar benerez ag an dei se :
- Penerezik ma neum c'heret
Evidon da Tremel a ieffet.
Digassit ganeoc'h eur plad allaouret
Da lakad va fen pa vin dibennet.
Digassit ganeoc'h lisseriou moan
Evid lakad va lianan.

Nag ar roue a respontas
Da Feunteunelle pa he c'hlevas :
- Ne rinki ked a plad allaouret
Evid lakad da ben pa vi dibennet.
Ta ben a ielo var ar pave
Da voul dotu d'ar vugale.
Da korf a ielo var an hentchou
Da sponta al lapouse(t a nentchou)

o Gortoz a
laboused:

Na Feunteunelle a lavare
Na dar Roue nag en deis se :
- Trohit eur pennad va bleo melen
Da staga oc'h pors Trevian.
Evid ma lavaro an Tremelianis :
Doue a pardonno ar markis.

vvvvvvvvvv

Marie Bozeg, 18 fevr. 1851.

vvvvvvvvvv